

ISTORIOU

TENNET EUZ AR SKRITUR-SARR

gat an Tad BERTHE, Redamptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEC.

LEORIK UNAN VAR'N UGENT.

PROSEZ

HOR ZALVER

JEZUS-KRIST



NEUVILLE-SOUS-MONTREUIL

IMPRIMERIE NOTRE-DAME DES PRÉS

ISTORIOU

TENNET EUZ AR SKRITUR - SAKR

gat an Tad *BERTHE*, Redemptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEC.

LEORIK UNAN VAR'N UGENT.

PROSEZ

HOR ZALVER

JEZUS-KRIST



NEUVILLE-SOUS-MONTREUIL

IMPRIMERIE NOTRE-DAME DES PRÉS

IMPRIMATUR.

C. LELEUX, Vic. Cap.

Arras, 15 Août 1892.

APPROBATION DE Mgr LAMARCHE

ÉVÊQUE DE QUIMPER ET DE LÉON.

ÉVÊCHÉ
DE QUIMPER
ET DE LÉON

Quimper, le 25 mars 1892.
En la Fête de l'Annonciation
de la Sainte Vierge.



Cher Monsieur le Curé,

Les Récits Bibliques du R. P. Berthe, Rédemptoriste, obtiennent un grand et légitime succès. Ce sont des résumés substantiels et admirablement faits de l'Histoire de l'Ancien et du Nouveau Testament.

Vous avez eu la pensée et je vous en félicite, d'en faire bénéficier notre pays Breton qui y trouvera un complément très utile du beau livre *Testament Coz ha Testament Nevez*. Je ne puis donc que vous encourager grandement à poursuivre votre excellent travail de traduction, qui, pour une part très sérieuse, servira les intérêts de la Foi et de la Langue Bretonne dans notre pays.

Croyez, cher Monsieur le Curé, à mes sentiments d'affectueuse estime et d'entier dévouement.

† THÉODORE, Evêque de Quimper et de Léon.



PROSEZ HOR ZALVER JEZUS-KRIST

I.

HENOR GREAT DA JEZUS, PA BIGN DA JERUSALEM.

N'oa mui nemed nebeud dervezioù ac'hano da c'houeliou Pask. Pelerined a vilierou a bigne da dempl Jerusalein evit en hem burifia. Goulen a reant kelou euz a brofed Nazareth n'en hem ziskueze mui dirak an dud, hervez a lavarent, abaoe m'o doa ar Farizianed hag ar veleien vraz roet urz da bephini da ziskuill e pe leac'h e vije. « A sonjal a ra deoc'h ne deui ket d'ar gouel » a c'houlennent entrezo. Pep hini a lavare he c'her.

Setu ma zêo redet ar brud en eun taol-kount ema Jezus e Bethanii hag ema e vont da bignat d'an templ en despet d'an eskummunugen laosket varnha. Kerkent, emolc'h er gear zantel. Bandennou

pelerined a bigne var menez Olivet evit guelelet ar mestr hag ive Lazar, savet euz ar bez.

Jezus a reas ar brassa digemer d'an dud-se o devoa kement a c'hoant da glevet he gomzou. Lazar hag holl dud ar geriaden a gountas ar mirakl braz great gat ar profed, en henvelep fessoun ma savas eun niver braz a dud a du gat Jezus, ken na oue spountet prinsed ar veleien. Ar re-ma a gemeras kement a imor ma rejont ho zonj da laza Lazar. Rak an test beo-ze a ioa aoualac'h evit karga Jezus a c'hloar ha gelei a vez an dud hipokrit hen tamalle.

Setu penaoz oa troet ar sperejou, pa ziblassas Jezus, d'ar zul vintin, euz a Vethanii, evit mont da Jerusalem. En dro-ma, e fell dezha mont e kear evel roue, guir vap David, ar Messias digasset gat Jehovah da zelvra ha da zavetei he bobl. He ziskibien a iea assamez gatha ha gortoz a reant ive m'hen dije erfin Jezus savet he rouantelez. An toullad tud a ioa en-dro dezha abaoe daou zervez a iea d'he heul hag a grie a bouez-penn gat joa. Pa erruont e menez Olivet, tost d'ar geriaden hanvet Bethphaje, Jezus a reas d'an holl chomm a-za. Tenna a ra a gostez daou euz he ziskibien hag e lavar dezho : « It d'ar vourgaden a zo dirazoc'h. Pa erruoc'h eno e kavoc'h eun azenez stag ha gathi eun azen iaouank stag ive ha n'euz bet morse den var he gein. Distagit-ho hag ho digassit d'in. Ma lavar unan bennak deoc'h : « Perak e tistagit al loened-se ? C'hui a lavaro dezha e zeo dre urz ho mestr ha raktal e lezo ac'hanoc'h d'ho digass ama. » An daou gannad, pa errujont, a gavas an azenez hag an azen stag er meaz ouz an or, hag ho dis-

takchont. Ar perc'hen a c'houlennas digatho petra o doa sonj da ober. An diskibien a respountas dre gomzou Jezus : « Hor mestr en deuz izom anezho. » Var gement-se ho lezas da vont gatho.

An azen a ioa bet pell amzer loan-bass ar rouanez ha var eun azen e tle guir roue Juda mont en he gear kapital, hervez m'hen doa lavaret ar profed Zakarii : « En hem roit d'ar joa, merc'h Sion ! Setu ho roue e tont beteg ennoc'h leun a zouder, pignet var eun azenez hag he azen. »

An ebstel a grede oa deuet an amzer d'ho mestr da veza roue hag a zo mall gatho tenna ho dillad hag ho lakaat var al loened ma tle pignat varno ho mestr. An holl neuze, leun a joa, a gerz varzu Jerusalem.

Eun dervez a driomf oa evit hor Zalver. Dont a rea kalz tud d'he ziambrouk, brankou palmez en ho dourn hag en eur grial gat-joa. Setu paket Jezus etre daou gouchad tud. Lod a deu euz kear, ar re-all a ioa deuet d'he heul adalek Bethanii. Lod anezho a lede ho dillad ed-a-ed an hent ; lod all a drouc'he brankou guez hag ho zaole var an hent, hag holl var eur vouez e reant he vleudi.

An dud-se, pa zint pignet var gern ar menez, pa velont mogeriou guenn ar gear zantel, he faleziou dudiuz, an templ burzuduz gat he vogeriou huel, a ziroll da grial gat feiz ha karantez : « Hosanna ! Hosanna e bar an eñv ! Hosanna da vap ar roue David ! Benniget ra vezo an hini a deu, en hano an Aotrou, da zevel en he za rouantelez David, hon tad ! »

Ar bobl a-bez a anaveze eta oa Jezus ar Messias promettet da Abraham ha meulet kant guech gat

ar brofeted. Ne c'houlenne ket vell eget rei dezha ar gurunen a roue. Neuze ar Farizianed kizidik a en hem zilas e-touez ar bobl hag a rea rebechou da Jezus var digarez ma save ar bobl a enep Sezar.

« Mestr, emezho, ni ho ped, grit d'ho ziskibien rei peoc'h. » Jezus a respountas dezho : « Ne dal ket ar boan ; rak ma tav an dud, ar vein a grio. »

D'an heur-ze merkët gat Doue evit renta gloar d'he rap dirak ar Juzevien, den n'en dije gelllet miret ouz ar bobl d'her saludi evel roue. Gouskoude, divar gern menez Olivet, Jezus a vele ar Golgotha hag e leac'h ar c'han-a-levenez a-lev brema e touez an dud mignoun dezha, e klev iouherez ha blasfemour ar re a laka ho Doue d'ar maro. Ober a ra eur zell var Jerusalem hag e teu an dour en he zaoulagad :

« O Jerusalem, emezha, ma karfez hirio c'hoaz, en deiz-ma a zo lezet ganez, digeri mad da zaoulagad hag anaout an hini a ell, hag hen ebken, rei did ar peoc'h ! Mez skoet oud a zallentez. Setu tost an deiz ma teuo da inimied da gleuzia en-dro did ha da ouaska ac'hanod a bep tu. Da deuler a reint d'an douar ha bruzuna a reint ar vugale a zo ennod. Euz a Jerusalem ne jommo ket mean var vean abalamour ne c'heus ket anavezet an amzer ma zoa deuet an Aotrou d'az kuelel.

Dioc'h-tu goudeze, Jezus a iea e kear hag oc'h he heul, eun niver braz a ziskibien. An dud a ioa strafillet hag a c'houlenne an eil digat egile : « Piou eta eo an den-ze ? » Ar re a ioa gat Jezus a respounte. « Henez eo profed Nazareth ! Ar Farizianed a-vad a lavare etrezho : Guelet a rit e tro fall an traou evidomp. Ni or beuz her c'hondaonet, ha setu ar bobl a-bez e redek var he lerc'h.



II.

AR GOAN DIVEZA.

D'AR c'henta deiz euz a c'houeliou Pask, pa edot e vont da laza an oan paskal, an dis-kibien a deuas da gaout Jezus hag a c'hou-lennas digatha e pe leac'h e felle dezha e vije great ar Pask. Jezus a gemeras daou anezho, Per ha Iann, hag a lavaras dezho :

« It da Jerusalem. Eno e kavoc'h, e dor kear, eun den, eur podad dour gatha var he benn. Kit d'he heul beteg an ti ma ze ebarz ha lavarit da vestr an ti-ze : « An Aotrou en deus hon digasset da lavaret deoc'h eo tost he amzer hag emma e sonj ober ar Pask en ho ti gat he ziskibien. E pe leac'h e c'helfe-hen drebi gatho an oan paskal ? Diskuez a rei deoc'h eur zal vraz ha kempennet kaer. Eno e pourchassoc'h kement a vo red »

Evel m'en doa lavaret Jezus, Per ha Iann a gavas e dor kear eun den gat eur pod dour ag ho c'hassas da di he vestr, var menez Sion. Hema abrestas dezho he zal ha kerkent an ebestel a zavas an daol, da c'hortoz Jezus.

Pa deuas an abardaez, d'ar mare ma tispake ar stered kenta e bolz an enñv, Jezus a iegas d'ar gampr-se gat he ebestel. Kemeret a reas he blass oc'h

taol. Per ha Iann a lakeas en he gichen hag ar re-all goudeze tro-var-dro. Ar c'hàlonou a ioa trist ha leun a nec'hamant. Rak kredi a reat er-vad e vije eun dra bennak a vraz epad ar pred-se. Ar garantez en doa diskuezet dezho Jezus ken aliez a vech a ia c'hoaz var gresk hag a zo birvidik. « Eur c'hoant braz a moa, emezha, da zrebi ar pask-ma ganeoc'h araok mervel. Rak, emezha c'hoaz gat tristidigez, ar Pask diveza eo d'in da ober ganeoc'h, ken na zrebimp assamez ar Pask e rouantelez Doue. »

Kemeret a ra neuze ar c'halir a vije kasset da ober tro an daol, er penn kenta euz ar pred, ha goude beza rentet grassou da Zoue, e ro anezha d'he ebestel en eur lavaret: « Kemerit ar c'halir-ze; Evidon-me, ne evin mui euz a frouez ar vinien, ken na vezo deuet rouantelez Doue. »

An ebestel ne ouient ket petra da zonzal divar benn ar rouantelez-se. Mez kompren a rejont edont gat ar pred kimmiad hag ho c'hàlon a strissa muioc'h mui.

Jezus a zervichas dezho neuze euz ar boued gour-c'hemennet gat al lezen : louzeier c'huero, e memor euz ar vuez c'huero o devoa bet ho zud a berz an Ejipsianed; bara eb goell, abalamour an Hebreed, en deiz m'oant bet tennet euz an Ejipt, n'o doa ket bet amzer da zevel an toaz; erfin, an oan paskal, e memor euz ar goad en devoa prezervet ho zud koz. Mez er memez amzer, Jezus a zonzje en eun delivrans all. Ar goassa sklavaj n'eo ket hini an Ejipt, hag evit savetei an dud eo red goad eun oan all a ne deo hema nemed ar skeuden anezha.

Araok dispaka dirazho ar mister-ze, Jezus a fel-las dezha prepar kaloun he ebestel. Epad ar pred oa

savet diviz etrezho da c'houzout piau a vije da genta hag ar brassa er rouantelez nevez. Rak ar greden a jomme bepred en ho spered edo ho mestr e vont da zevel eur rouantelez euz ar bed-ma. Jezus a lavaras dezho :

« Rouanez ar brojou a goumand varnho evel mistri, Hogen, en ho touez-c'hui ne dle ket beza evel-se. An hini a zo ar brassa a dle en hem ober an disterra hag an hini a zo mestr a dle beza evel eur servicher. Piau eo ar brassa ? pe an hini a zo e servicha pe an hini a zo oc'h taol ? An hini a zo oc'h taol, ne ket ta ? Mad ; me, ho mestr, a fell d'in hirio ho servicha. »

Kerkent e sao dioc'h taol, e tivisk he vantel hag e skoulm eun tavàncher en dro dezha. evel ar sklaved. Neuze, goude beza lakeat dour en eur vassin, e renk he ziskibien en dro dezha. Daoulina'ra goudeze evit goalc'hi dezho ho zreid hag ho zec'ha gat he lienen. Holl e sellent an eil ouz egile, mantret :

Simon Per a oue he dro da genta.

— « C'hui, Aotrou, emezha, goalc'hi d'in va zreid ! biken.

— Per, a lavaras dezha Jezus, ar pez ne gomprenit ket brema, c'hui her c'hompreno diveza-toc'h.

— Biken, Aotrou, ne lezin ac'hanoc'h da oualc'hi d'in va zreid.

— Neuze no pezo ket a berz em rouantelez. »

Per spountet a respount dioc'h-tu :

« Pa zema an traou evel-se, oualc'hit ne ket ebken va zreid, mez va daouarn ha va fenn.

— Nan, a lavar Jezus adarre, an hini a deu euz an dour n'hen deus ken izom nemed da oualc'hi.

c'hi he dreid evit beza neat penn-da-benn; ha goude e lavar gat eur vouez melkoniet :

— « C'hui, emezha, a'zo neat; mez n'oc'h ket holl neat. »

Nan, n'oant ket holl neat. Unan a ioa e vont d'hen traissa. Ar reuzeudik-se a reas an neuz da veza drouk-ententet hag a-lezas Jezus da oualc'hi dezha ive he dreid evel d'ar re all. Jezus, p'hen deus echuet, a visk adarre he vantel, en hem laka oc'h taol hag a lavar d'he ebestel :

— « A gouzout a rid petra-meuz great ? C'hui a c'halv ac'hanon ho mestr hag oc'h Aotrou. Mad a livirit. Rak bez e zoun e guirionez. Ma meuz eta goalc'het deoc'h ho treid; m'ho mestr hag oc'h Aotrou, e tleit ive goalc'hi ho treid an eil d'egile. Roet e meus deoc'h ar skouer, evit ma reoc'h ar pezh a meuz great va unan. Ar servicher n'ema ket dreist ar mestr hag an abostol n'eo ket brassoc'h eget an hini en deus he gasset.

Nak a vurzudou ! nak a draou estounuz ! ha ne dint gouskoude nemed eur skeuden euz ar pezh a zo e vont brema de dremen !

An oan paskal a ioa drebet. Hennez n'oa nemed ar figur euz an oan paskal guirion, hor Zalver Jezus-Krist he unan. Varc'hoaz e vezo skuillet he c'hoad evit silvidigez ar bed; mez kement-se n'e ket aoualac'h evit he garantez. Felloud a ra dezha c'hoaz chomm bepred beo e touez an dud, bepred maro evit ho fec'hejou ha bepred drebet gatho evit ho maga hag ho c'hennerzi var hent arvro guirion. Deuet oa an heur-da zeveni ar bromessa hen devoa great diagent da rei he gorr evit magadurez hag he c'hoad evit evaj. Setu eta ma kemer Jezus, dirak

he ebestel dastumet en dro dezha, eur bara etre he zaouarn santel ha goude beza her benniget e ran-nas anezha etre he ebestel en eur lavaret : « Kemerit ha drebit : Rak hema eo va c'horv. » Goudeze e kemeras ar c'halir leun a vin ha goude beza her benniget e kinnigas anezha d'he ebestel en eur lavaret : « Kemerit hag evit holl ; Hema eo va goad, goad an allians nevez, a vezo skuillet evidoc'h hag evit ar bed holl. Grit kement-ma e memor ac'hanon. »

Dre ar c'homzou-ze Jezus, dre eun testamant a garantez, a roe d'he holl ebestel ha d'ar re a deuio var ho lerc'h, euz an eil kantved d'egile bete fin ar bed, ar c'halloud da gonsakri evel dha ar bara hag ar guin ha da chench anezho en he gorr sakr hag en he c'hoad presiuz.

Ha brema, setu echu amzer al lezen goz. N'e ket mui en templ savet var menez Moriah e vezo great ar misteriou sakr, mez e kamblid Sion.





III.

ANGONI.

GOUDE beza roet d'he ebestel kaerra tenzor a garantez a elle da rei, Jezus a gomzas dezho euz an traou estlammuz a ioa e vont da c'hoarvezoud. Diskleria' reas dezho oa unan en ho zouez, azezet ouz ar memez taol ag a ioa var-nez he verza hag he lakaat etre daouarn he adversourien. D'ar poent-se, Judas a ias er meaz euz ar gampr evit mont da gaout prinsed ar veleien. Pa oue echu ar pred, Jezus a ias, evel en deiziou diagent, varzu menez Olivet. Bale a rea goustadik etre he ebestel ha komz a rea outho gat muioc'h a galoun eget jamez. Komz a rea euz ar garantez a dle beza etre hi hag hen, euz ar garantez a dleont da gaout an eil evit egile. Da stourm o devezo a enep ar bed; goal gasset ha goapeat e vezint. « Mez, emezha, no pezet ket aoun; me'zo bet treac'h d'ar bed. » Goude beza kerzet dre draonien Josafat, ec'h errujont a benn nebeud gat froud ar Sedron a ran-kent da dreuzi evit mont d'ar menez. Jezus a jom-mas neuze a za. Trei a ra he zaoulagad etrezek he dad pehini zo en eñv hag e ped evit he ebestel hag evit an iliz a ioa da founti. « Grit, emezha, na dei

ket unan ebken da goll euz ar re oc'h euz roet d'in. »

Treuzi a reas neuze ar ster hag ec'h erru e bro tenval ar beziou. Eno, an draonien, etre menez Moriah ha menez Olivet, n'oa nemed eun hent striz ha doun ha dre eno e ruille ar Sedron gat he zour louz ha du. Var an hent ne gaver nemed mogeriou diskar ha beziou. Jezus a dreuz an draonien-ze a varo a vezo divezatoc'h traonien ar varn diveza. An ebestel a iea d'he heul, trist ha nec'het.

Prestik goudeze, ec'h erruent, e traoñ ar menez, gat eur verouri hanvet Jetsemani. Eno e zoa eur jardin, ag oa kustumet hor Zalver d'en hem denna ennhas da ober he beden. Araok mont ebarz, e la-varas d'he ebestel :

« En noz-ma, e vezin evidoc'h holl eun abek a ouall-lamm ha tec'het a reoc'h diouzin. Rak skrivet eo : « Skei a rin var ar pastor hag an derved a dec'ho a bep tu. »

An ebestel a gave ar c'homzou-ze tenn ha ne lavarent ger. Mez Per, drouk ennhha abalamour d'an disfizians en doa anezha Jezus, a respountas gat nerz. « Mestr, a pa ziousse d'an holl tec'het, evidon-me a jommo en ho kichen. »

— Per, eme Jezus, en noz-ma zo-ken, araok m'en dezo ar c'hillok kanet diou vech, c'hui o pezo va nac'het teir guech.

— Nan, Aotrou, an dra-ze ne vezo ket, a lavar Per d'he dro; ha pa rankfen mervel ganec'h, biken n'ho nac'hin. »

An ebestel all a lavaras evel dha. Mez Jezus ho anaveze guelloc'h eget n'en hem anaiant ho unan. Guelet a rea oant leal, mez gouzout a rea ive oant dinerz. En eur vont er jardin, e lavaras dezho :

« Chommit ama ; evidon-me, me'zo e vont eun tamik larkoc'h da bedi. »

Kemeret a reas da vont assamez gatha Per, Jakez ha Iann, an tri a ioa bet test euz he dransfiguration gloriuz var menez Thabor int-hi ebken, sklerijennet gat ar mirak kaer-ze, a ioa goest da velet anken ha trubuillou map Doue, eb ankouna-c'haat oa e guirionez map Doue.

A veac'h edo he unan gatho, ma koez en eun enkreuz ar vrassa. Doue he dad ne leze gatha mui nemed an nerz en doa evel den, hag an den-ze a gemeras evel spount rak ar verzerenti en dezo da c'houzaon. Anken, spount, tristidigez a goez var he ene ken na lavar ar c'homzou glac'haruz-ma :

« Va ene a zo trist evel ar maro. » Anez mirakl, Jezus evel den a varve dindan ar beac'h euz he boaniou. — An tri ziskib sebezet ha mantret a zelle outha a-druez eb kredi lavaret eur gomz. Neuze Jezus a lavar dezho : « Chommit ama ha pedit epad ma zin va unan ive da bedi. » En hem denna a reas dioutho gat kalz poan, var ed eun taol mean, beteg eur c'havargn hanvet hirio c'hoaz kavargn an Angoni. Kerkent a ma zeo erruet eno, e vel e tremen dirak he zaoulagad binviachou ar maro : ar c'herdign, ar foetou, an tachou, ar spern, ar groaz, ar vourrevien, leiz ho ginou gatho a c'hoaperez hag a vlassfemou, eur bobl diskiantet ag a ra dezha goassa a c'hell.

Kement a zonjer en doa, ma vennas dont var he c'hiz. Erfin, gouskoude, e koez d'an daoulin, he fas stouet d'an douar hag e ra ar beden-ma da Zoue : « Va zad, ma n'eo ket red d'in eva ar c'halir-ma, pellait anezha diouzin. Mez ra vezo great ho polontez ha nan va hini-me. »

Doue an tad a felle dezha en dije he vap evet beteg al li ar c'halir c'huerdo-ze. Setu perak ne zelaouas ket he beden. Jezus neuze a zao hag a zistro varzu he ebestel evel p'hen dije izom da gaout digatho eun nebeud konfort. Mez ar re-ma a ioa skoet ive gat an dristidigez ha mor-gousket. A veac'h zo-ken ma c'hanavezent ho mestr. En hem glem a reas dre ma zoant ken dizonj anezha hag e lavaras ispisial da Ber a rea, n'euz ket pell, kement a bromessaou kaer : « Kousket oc'h, Simon, emezha ; petra ! n'oc'h euz ket gellet beilli ganhen eun heur ebken. Ah ! Beillit ha pedit evit ne goezoc'h ket en dentasion. Rak ar spered a zo prim ; hogen ar c'hig a zo dinerz. »

Jezus neuze a zistro adarre d'ar memez leac'h. Dont a ra dirak he zaoulagad n'e ket mui spes ar maro, mez ar pez a zo bet kirriek d'ar maro, ar pec'hed. Ar pec'hed en hem ziskoez dezha evel eur pëz euzuz, gat an holl abominasionou hag an holl torfejou great abaoue Adam beteg an diveza torfed great gat an diveza euz an dud. Hag eur vouez a grie hag a lavare dezha : « Kemeret o c'heus ar pec'hed varnoc'h. Deoc'h eo paea evit ar pec'hed. Koeza'ra adarre d'an douar, he galoun bruzunet gat ar c'hlaç'har.

— « Va zad, emezha, mar d'eo red d'in eva ar c'halir-ma, ho polontez bezet great ! »

Neuze e tistro adarre beteg he ebestel. Mez ho daoulagad a ioa klozet gat ar c'hoant kousket hag ho spered a ioa evel maro. Nikun ne gavas eur gomz da lavaret dezha. — Eun drede guech, e tistro d'ar c'havargn evit tremen eno dre eun angoni spountuz. En hem velet a ra goloet a höll bec'hejou

ar bobl, goal gasset en he gorr, goal gasset en he ene. Guelet a ra miliounou a dud e c'hoapaat anezha euz an eil rumm d'egile, e persekuti an iliz, e vressa dindan ho zreid an hosti sakr, e vruzuna he groaz, e vlasfemi en he enep hag e tiskenn a benn-kreizoun en ifern-ze oa deuet da gloza dindan ho zreid gat ar priz euz he c'hoad.

Pa vel kement a ingrateri, e koez d'an douar evel anter-varo. He gorr a zo goloet a c'hoezen; ar berajou goad a ruill a-ed he vizaj hag betek ar boultren. Gouskoude he galoun ne ehane da bedi ha gat he vouez simpleat e lavare c'hoaz d'he dad oa prest da ober he volonteze ha da eva ar c'halir c'huero betek al lii.

Marvet e vije eno gat ar rann-galoun ma ne vije diskennet eun eal euz an env d'he gonforti ha d'he gennerzi. Neuze e savas seder ha laouen. Distrei a reas betek he ebestel hag e lavar dezho : « Deuet eo an heur, n'eo ket da gousket mez da vont d'ar boan. Savit ha deomp. Setu erruet ar moment ma vezo map an den lakeat etre daouarn ar bec'heurienn. An hini a dle va guerza n'ema ket pell ac'hann. »

Oc'h sklerijen al leterniou e c'heljont guelet e kichen dor ar jardin eur vandennad tud armet. Judas oa gat prinsed ar veleien hag ar zoudarded a dlie kemeret Jezus.



IV.

JEZUS EREET.

EPAD an teir heur goude m'oa tec'het euz ar gampr, Judas ne gollas ket he amzer. E tiviz oa bet gat ar pennou braz euz ar c'honseil. Lavaret a reas dezho freaz e zea Jezus bep noz gat he ebestel bete menez Olivet hag e tremene an amzer en eul leac'h distro ag a anavez. Rak-se, ne vije ket diez kregi ennha eb lakaat an disterra emolc'h e touez ar bobl. Prinsed ar veleien a gavas mad ar pezh a ginnige dezho an traitour. Eb dale tam, e savont soudarded evit mont da gregi e Jezus. Lakeat oa var zao ar zoudarded romen o devoa karg da zioual an templ hag an holl dud a ioa e servich ar belek braz. Holl oant armet mad. Kalz tud euz ar bobl intre a iea da heul ar zoudarded gat pikou, bizier, torchou ha leterniou. Tud ar c'honseil braz a ioa assamez gat ar zoudarded evit ho c'helen, e ken kaz a izom.

Judas a ieas er penn araok evit diskuez an hent. Evel ne anaveze ket ar zoudarded Jezus, o doa urz da jomm a-za e dor ar jardin epad ma vije eat Judas betek he vestr ha m'hen dije diskuezet dezho holl dre ar pok oa boazet ar gerent hag ar vignoured

da rei an eil d'egile evit en hem zaludi. « An hini a bokin dezha, en doa lavaret an traitour, hennez eo. Pegit ennha ha diouallit-hen mad gad aoun na dec'hfe diganeoc'h. »

Judas a ieas eta he unan bete Jezus, ha pa oue en he gichen : « Mestr, emezha, me ho salud, » hag e roas dezha eur pok, pok sakrilaj ! Jezus n'hen reuzas ket dre druez oc'h he abostol reuzeudik ; mez lavaret a reas dezha gat eun dousder eb he far : « va mignoun, petra oc'h deuet da ober ama ? Petra, Judas ! Dre eur pok e teuit da draissa map an den ! »

E leac'h koeza d'an daoulin ha goulenn pardon, e leac'h distrei varzu an ebestel abalamour en doa aoun da veza gourdrouzet, Judas a zo evel dallet hag a zistro varzu ar zoudarded. Ar re-ma a gred en deus eun dra bennak da lavaret dezho hag a jomm eur pennad eb mont araok. Red oa da Jezus diskuez sklear d'an dud-se ha d'ar bed holl e zea d'ar prizoun a volonteaz vad, n'oa ket bet kemeret, mez oa en hem roet. Ne c'hortozas ket eta ma vije peget ennha ; mez mont a reas beteg ar zoudarded hag e c'houlennas outho gat eur vouez kreñv :

— « Piou a glaskit ?

— Jezus a Nazareth, emezho.

— Me eo, a lavar Jezus, »

Kerkent, ha var ar gomz-se ebken, soudarded, mevelien prinsed ar veleien, seziet gat ar spount a goez e stok ho c'horv var an hent.

Pa blijas gat an Doue holl-galloudek rei dezho konje da zevel adarre, e safchont. Jezus, en he za dirazho, a c'houlenn eur vech c'hoaz :

— « Piou a glaskit ?

— « Jezus a Nazareth, emezho.

— Me eo Jezus a Nazareth ; e m'aoun e paouez hen diskuez deoc'h. Pa z'eo guir eo me ebken a glaskit, lezit ar re-ma da vont kuit. »

En eur gomz evel-se e tiskueze dezho he ebestel a ioa en-dro dezha. Ar zoudarded a zentas hag evel-se, e sevenas ar gomz lavaret gatha n'oa ket pell c'hoaz : « O va zad, ne meus ket kollet unan euz ar re o c'heuz roet d'in. » Eun dra estounuz eo o deffe gellet en hem denna holl a brez. Rak c'hoanteat o doa derc'hel penn ouz ar zoudarded. Pa zeas ar re-ma, poulzet gat ar veleien, da gregi e Jezus evit he gass d'ar prizoun, an unneg abostol, kounnar ennho, a deu en-dro dezha en eur grial :

« Mestr, a skei a reimp-ni gat ar c'hleze ? »

Per, zo-ken, ne roas ket a amzer da Jezus da respount. Mez tenna' ra he gleze, skei a ra var benn Malkuz, mevel ar belek braz, ha distaga'ra dioutha he skouarn deou. Jezus a gavas eno an dro da ziskuez adarre oa Doue.

— « Aoualac'h, emezha d'he ebestel. »

An ebestel a zent var ar ger. Jezus neuze a dosta ouz Malkuz ; touch a ra ouz he skouarn ha kerkent eo pare. Neuze e lavar freaz da Ber ha d'ar re a ioa var-dro ne dale ket ar boan klask stourm ouz kement a dud, hag ouspenn-ze, ma o devoa he ad-versourien lakeat ho dourn varnha, oa abalamour m'en hem roe a volonteaz vad. « Lakit ho kleze el leac'h m'edo araok. An nep piou bennak a gemero ar c'hleze a varvo dre ar c'hleze. Hag ouspenn, daoust a ne ket red d'in eva ar c'halir a zo kinniget d'in gat va zad. A kredi a rit, m'am bije galvet va zad d'am zikour, n'hen dije ket digasset d'in dioc'h.

tu, e leac'h daouzek den dic'halloud, ouspenn da-ouzek lejon a elez ? Nan, nan ; red eo e teuffe da vir penn-da-benn ar peza zo merket er skrituriou sakr. »

Rei a ra da entent ive da dud ar Sanhedrin a ioa assamez gat ar zoudarded, e zea d'ar maro abalamour ma oa en hem ginniget he unan. En eur drei ouz ar veleien, an doktored hag ar re vraz euz ar bobl, e lavaras dezho :


« Deuet oc'h d'in evel da eul laer gat klezeier ha bizier. Hogen, deskit er-vad, an armou no deus nep galloud varnon-me. Bemdez e vijen azezet en templ en ho touez, e teski deoc'h va lezen : Petra eo deoc'h n'oc'h euz ket lakeat ho taouarn varnon neuze ? Abalamour an heur merket gat va zad n'oa ket deuet c'hoaz. Mez brema ho c'heur-c'hui a zo deuet, heur prinsed an denvalijen. Eur vech c'hoaz red eo e teuffe da vir penn-da-benn kement a zo merket er skritur sakr. »

Mez an dud-se a ioa dallet gat ar gassoni, ha sulvui e tiskueze Jezus oa Doue, sulvui e kreske ho c'hounnar. Rei a reont urz d'ar zoudarded hag ar re-ma a c'harrotas Jezus evel eun torfetour. Ar mestr divin a astennas he zaouarn d'he vourrevien.

An ebestel, pa veljont kement-se, ne eljont ket miret da fall-galouni. Pa valent ne dorre ket he ereou, e leze ar zoudarded d'he c'hoapaat evel ma karent, pa glevent ar veleien hag ar skribed e vlasfemi en he enep ; pa glevent ar bobl e c'hourdrouz anezho a bouez penn hag e vallozi varnho, e kemerjont spount. Ankounac'haat a rejont ar bro-messaou kaer o devoa great hag e tec'hchont kuit, pep hini dre he hent. Unan ebken, eun diskib

iaouank da Jezus, deuet d'ar red da velet petra' rea ar zoudarded, a fellas dezha heuill he vestr. Ar re-ma a resevas urz d'her paka ha dija oant krog en he vantel. Mez an den iaouank a lezas gatho he vantel hag a dec'has en noaz.

Jezus a jomme eta he unan e kreiz he adversourien. Ar bassion ; ar bassion griz a ioa e vont da goumans.



V.

KENTA GOULENNOU.

Ar Farizianed, eur vech ma zint mestr da Jezus, a ell dizac'ha eb aoun ar gassouni vraz a vagent outha abaoe pell amzer. Evit diskar, var ho meno, ourgouilan denze a lavare oa ar Messias, e rejont dezha evel d'an dorfetourien euz ar renk izhela. Urz a roont d'ar zoudarded d'he jadenna; hag epad ma lakeant dezha an ereou, an dud divergont-ma a laoske varnha a bep seurt komzou groz ha sot. Staget oue dezha he zaouarn var he beultrin. En-dro d'he gory oue lakeat eur jaden hag ouz ar jaden-ze oue staget kerdign. Divar bouez ar c'herdign-ze e reat dezha kerzet, evel pa vije bet eul laer pe eur muntre. An toullad tud-ze a ziblassas vardro an anter-noz, evit pignat var menez Sion. Rak eno edo palez Kaifaz. Eno, e tlie Jezus beza barnet. Pa edont e tremen dre bount Sedron, ar zoudarded gouez-se, poulzet gat ar Farizianed, a daolas Jezus er ster. N'en doa evit guiskamant nemed he zae hag he vantel. Taolet oue a stok he gory var eur bern mein, e kreiz al lec'hid. Ha setu an dud-se o tiroll da c'hoarzin, da c'hoapaat ha da vlasfemi goassoc'h eget biskoaz.

A n'oa ket plijaduruz evitho gullet taolet er fank an den-ze a viraklou deuet emezha, da zelvira Israël. Ne ouient ket ar c'hoarzerien divalo-ze e teue er moment-se memez da vir ar pezh en doa lavaret ar profed David : « Var an hent, ec'h evo dour euz ar froud, ha setu perak e savo huel he benn¹. »

Goude an taol kaer-ze, ar prizounier stlejet gat he vourrevien a bign var menez Moriah. Tremena ra dre ar memez dor ma oa eat dreizhi e triomp, nebeud derveziou araok. Kear Jerusalem a ioa neuze kousket. Eun tam trouz bennak a zao gouskoude, dre ma passe ar vanden dud-se. Pennou braz ar Sanhedrin a felle dezho echui an affer en nozvez-se memez. Setu perak o doa kaset kemenn d'ho c'honsorted da zont dioc'h-tu da balez Kaifaz ha tud fall a oue kaset ive da glask testou faoz evit rei d'ar varn disleal-ze al liou euz a eur varn great hervez al lezen.

Erfin, evel ma renket rei eun tam brud d'ar varn, oue galvet da zont ar re a ioa e touez ar Farizianed brassa adversourien profed Nazareth hag he lezen. An dud dister hag intre, prest atao da harzal var eur sin-euz ho mestr, a ioa dija kalz rimu gatho.

¹ Istor pount Sedron n'ema ket er skritur sakr. Ne anavezomp anezhi nemed dre ma zao bet kountet a c'hinou da c'hinou, euz an eil rumm d'egile. Hirio c'hoaz, e c'heller gullet e kichen pount Sedron ar mean oa koezet varnhar Zalver. Lezet en deus ennha ar merk euz he zaoulin, euz he dreid hag euz he zaouarn. An iliz a ro ive induljansou da c'hounid da gement hini a ia da zaoulina var mean Sedron, deuet da veza unan euz Stasionou hent ar gapti vite.

Jezus oue kasset da balez Anna, var menez Sion, daouzek kant paz dioc'h ar jardin Olivet. Ar zoudarded a stagas ar prizounier ouz eur vezen, er porz, da c'hortoz ma vije plijet gat ar belek braz ober dezha eul lastez goulenn bennak. Eno Jezus en devoue adarre da c'houzaon a bep seurt dismegans a-berz ar c'hoz soudarded hag ar mevelien.

Anna a ioa bet belek braz epad seiz vloaz. He vap kaer Kaifaz a ioa bet lakeat en he blass, eur pennad a ioa. Ar garg a veleg braz a ioa evit ar vuez hag al louarn koz, dre ar brud a ioa e zoa eun den desket ha mad, en doa gouezet dastum danvez hag henoriou ; ha deuet oa da veza ar c'henta er c'honseil. Kaifaz a ioa eun azen, bepred prest da skei. Ne rea netra nemed dioc'h kuzul he dad kaer. Setu perak oue red kass Jezus da Anna var eeun, araok ma vije assamblet ar Sanhedrin, evit ober enklask ha lavaret ar zetans a vezo da zougen.

Pa oue kasset dirak ar belek koz-se, n'hen doa guir ebéd da ober goulennou outha, Jezus ne ziskuez nep aoun razha hag he vizaj a zo douss ha laouen.

Anna a réas dezha eur goulenn bennak divar benn he lezen hag he ziskibien. Sonjal a rea dezha en dije kavet merkou sklear evit anaout oant e labourat dre-guz a enep lezen Moizes. Mez fazia'rea. Euz he ziskibien, Jezus ne lavaras ket eur ger ; euz he lezen a-vad, setu ama petra' lavaras.


— « Prezeg a meuz great er Sinagog hag en templ dirak an holl. Ne meus lavaret netra e-kuz. Perak eta e rit-hu goulennou d'in divar benn va lezen ? Goulennit digat an dud o deuz va c'hlevet. Gouzout a reont petra' meuz lavaret ha renta a reint testeni d'ar virionez. »

Ne ellet ket respount gat muioc'h a furnez hag ar belek koz ne ouie e pe du en hem drei pa deuas unan euz he vevelien d'he zikour. Tostaat a reas oc'h Jezus ha distaga' reas gatha eur javedad en eur lavaret gat kounnar : « Ag evel-se eo komz ouz ar belek braz ? »

Jezus, eb diskuez netra a zianveaz, a respountas d'an den reuzeudik-se : « Ma meuz goal gomzet, diskuezit d'in e pe leac'h oun faziet. Mez ma meuz komzet mad, perak e teuit-hu d'am fasata ? »

Ar c'hoz mevel a jommas sioul koulz ag he vestr. Anna a zo savet mez gatha, ha gat aoun da baka kement all, e kassas an dud-se d'he vap kaer Kaifaz. Eno eo erruet dija tud al lez-varn.





VI.

JESUS HA KAIFAZ.

Ivir kompren ha gouzoud ervad perak eo bet ar varn-ze ken disteal ha kêr faoz a enep Jezus, eo mad d'omp gueleit piou ha petra oa an dud-se karget d'he varn.

Ar prezidant, Kaifaz, ar penn brassa euz ar vro a ioa eb deskadurez, mez adversour touet da Jezus; Abaoue pemp bloaz ma oa belek braz, n'hen doa ket en hem jalet kalz gat lezen Moïzes, na gat ar sakrifisou, na gat ar relijion, en eur ger Saddusean oa, da lavaret eo, unan euz an dud-se ne gredont mui d'ar guirioneziou koz, ne gredont ket e teui ar c'horfou a varo da veo, nak e chommo bepred an ene eb mervel. Kement a glasse oa dastum danvez ha kemeret he blijadur. P'en doa Jezus depeignet ar falz pinvidik e rosta en ivern goude eur yuez tremenet e kreiz ar plijadureziou, eo patrom Kaifaz hen doa great hag an holl o doa he anavezet. N'oa ket muioc'h douget evit he vro eget na doa evit Rom; a bouez paea edo ar c'henta e Jerusalem. Petra elfe rei dezha guelloc'h roue ar profeted, roue nevez Israël?

Dek ha triugent oant er c'honseil, holl tud fal-

lagn ha digoustians nemed Josep a Arimathii ha Nicodem. Ar-re-ma zo-ken n'oaht ket deuet d'ar c'honseil. Ar re all oa : Anna hag he vugale; kalz memproù all euz he famill anavezet gat an holl evit beza adversourien da Jezus, Sadduseaned kounnaret a enep he lezen rust ha skribed o doa goarizi outha abalamour ma oa deuet mad gat ar bobl.

Evit diskuez e ber gomzou petra oa tud al lez-varn-ze eo aoualac'h digass da zonj o devoa dija, bete teir guech, kondaonet Jezus, eskummuget ar re a iea d'he heul; ha d'ar maro e ranke beza lakeat. Eur vech, Kaifaz en doa touet en dije an den-ze, dre he brezegennou, lakeat ar bobl d'en hem zevel a enep ar Romaned hag edo ho bro e danjer braz da veza diskaret. Alia a rea eta lakaat an den-ze d'ar maro evit savetei ar re all. Ar c'honseil abez a oue a unan gatha. Setu Jezus eta kondaonet en avans gat prezidant ar c'honseil ha gat ar c'honseil a-bez. Penaoz goudeze gortoz justiss ha lealded a-berz tud evel ar re-ze?

Evel-se, e doug ar prosez, e torrent an holl lezennou. Difennet oa d'an dud a justiss barn deiz pe derc'hent deiz ar zabbat. Rak evel ma tlie an torfetour beza lakeat d'ar maro dioc'h-tu goude ar zetans, e vije bet red terri repoz santel ar zabbat evit renka an traou nesesser. Difennet oa ive barn eun affer a varo en noz, dindan boan da lakaat ar zetans nul. Ouspenn, ar justiss a dlie beza rentet e publik. Setu perak an dribunal-ze ne laboure nemed adalek ar sakrifis dioc'h ar mintin beteg ar sakrifis d'an abardaez. Mez ar Sanhedrin n'ema ket e poan gat al lezennou-ze. Arreti a ra Jezus da c'houel braz ar Pask, derc'hent ar zabbat, d'an an-

ter-noz, hag a benn eun heur goude e tigor ar pro-sez. Ar gassounni a zo en ho c'halloun ne ro ket amzer dezho da c'hortoz sao-heol ; rak red e vezo deski d'ar bobl vare'hoaz pa zihuno, eo Jezus-kondaonet. Ne jommo ket an dud ken touellet gatha pa en devezo ar c'honsel braz diskleriet en deiz ar falz profed-se manket da Zoue ha d'ar vro.

Setu Jezus dirak ar Sanhedrin. Evit kaout eun digarez d'her lakaat d'ar maro, ar varnerien ho unan o doa kemeret testou faoz evit toui oa en hem zavet Jezus a enep lezen Moïzes. (Mez an testou-ze en hem drouc'he an eilegile, en henvelep fessoun ma zoa sklear da bep hini n'oa gatho nemed gevier ; ar pez ho lakea e kaz da veza goal bunisset. Evit tenna ar varnerien a boan, e savaz daou dest ag a dlie goal-zamma Jezus.

— « Me a meuz klevet anezha e lavaret, eme unan anezho : « Me a ell diskar templ Doue hag her sevel en he za e tri dervez.

— « Me, eme egile a meuz klevet anezha e lavaret : « Me a ziskaro an templ-ma savet gat da ouarn an dud, ha goude tri dervez me a zavo eun all a ne vezo ket great gat dourn an den. »

Eur goal dra a damallet dezha hervez ar Juzevien. Rak touch ouz an templ, oa touch ouz ar vro, ouz ar relijion, ouz Moïzes. Ama c'hoaz Jezus a zo tamallet e gaou. Rak Jezus n'en doa ket lavaret : me a ell diskar, pe, me a ziskaro. Er c'hountrol, ar pez en devoa lavaret oa : Distrujit c'hui an templ hag e tri dervez me her savo en he za. Jezus n'en devoa, e nep fessoun, gourdrouzet diskar an templ. Ouspenn c'hoaz, ama e komze euz templ he gorf a vezo e guirionez distrujet gat ar Juzevien hag a

zavo a varo da veo d'an trede deiz, evit diskuez he holl c'halloud.

Pa oa echu gat an testou, Kaifaz a reaz eur zell rust var ar mestr divin hag a ordrenaz dezha respount. Mez Jezus ne lavar ger. Mont a ra drouk neuze e Kaifaz ; sevel a ra en he za evel eun den ag a ve great eun dismegans vraz dezha hag e lavar :

— « Ac'hanta ! a n'oc'h euz netra da respount d'ar pez a zo tamallet deoc'h gat an dud-ma ? » N'oa ket kalz tra da lavaret pa z eo guir eo an daou desteni dishenvel ha nul hervez al lezen. Ouspenn, sklear aoualac'h oa n'oa ket bet Jezus e sonj da bilat an templ. Daoust a n'hen doa ket lakeat an drafikerien er meaz euz an templ ? Daoust a n'her galve ket ti he dad ? Mez he varnerien a ioa tud fallagr ag o doa paet testou faoz, ha gouzout a reant ho unan petra da zontal euz an testeniou sot-ze. Da dud evel ar re-ze n'oa netra da respount. Erfin, Jezus, en eur devel, a felle dezha kass da vir ar pez a lavare guethall ar profed David : « Ar re a glaske digarez evit tenna diganhen va buez a lavare em enep traou vean ha faoz. Mez evitho me a ioa evel eun den bouzar a ne glev ket, evel eun den mut a ne zigor ket he c'hinou. »

Kaifaz, den ter, a hegare. Evit lakaat an affer da vont buhannoc'h en-dro, e teu he unan da damall Jezus, pe, evit lavaret guell, felloud a reas dezha, en despet d'al lezen, lakaat Jezus d'en hem damall he unan. « Me a c'hourc'hemen deoc'h en hano an Doue beo, emezha gat eur vouez rog, lavaret d'eomp a c'hui eo ar C'hrist, map an Doue benniget. »

Jezus n'oa ket red dezha respount. Rak lezen Moizes a zifenne ober d'an den tamallet toui gat aoun na vije lakeat etre daou : terri he le, pe en hem damall he unan. Kaifaz a zonje e vije bet mall gat Jezus lavaret oa Doue, dirak an niver braz a dud-se. Goude tout, emezha, pe e c'hanzave, pe hen a nac'ho eo Doue, ema kollet. Ma nac'h eo Doue, ni her c'hondaono evel eur gaouiad. Rak aliez a vech en deus prezeget dirak ar bobl oa ar C'hrist. Ma lavar : ia; ni her c'hondaono c'hoaz evit beza blasfemet ha beza eb guir ebed kemeret titrou an aotrou Doue.

Kaifaz en doa skoet just. Rak pa c'houlennas he ditrou digat Jezus, e respountas dezha eb aoun : « Her lavaret oc'h euz : Me eo ar C'hrist, map d'an Doue beo, hag eun deiz, e veloc'h map an den azezet en tu deou d'he dad e tisken var goabr an env evit barn an holl dud. » Ar belek braz ne c'hortoze nemed ar ger-ze. « Blasfemet en deuz, emezha en eur regi he zillad gat fulor ! Pebez izom or beuz-ni c'hoaz a desteniou ? »

Ama adarre Kaifaz a i eas a enep al lezen. N'oa ket dezha oa diskleria en doa Jezus blasfemet. Hervez al lezen, e tlie goulenn mouez ar gonsellerien all araok barn he unan. Red oa evessaat mad ouz respount Jezus araok diskleria oa eur blasfem. Perak ne vije ket Jezus ar Messias, map Doue, evel m'her lavare. Ar merkou roet gat ar brofeted evit anaout ar Messias, a n'ho c'havet ket e Jezus a Nazareth ? En hem ziskuezet oa d'an dud d'ar mare merket gat Daniel, ha d'ar poent ma oa goalen ar roue tec'het euz Juda, hervez komzou Jakob. A n'eo ket ganet e Bethleem, hervez m'en doa lavaret, abaoue pell amzer, ar profed Micheaz.

He lezen a zo santel ; he vuez, santelloc'h c'hoaz. Epi tri bloaz en deuz pareet ar re vouzar, ar re vut, ar re seizet, ar re zall, ar re possedet gat an droik-spered ; ha zo-ken, en deuz digasset tud a vare da veo. Mar doa guir kement-se (ha milierou a dul a vije kavet da doui oa guir) perak ne vije ket anavezet Jezus evit ar Messias promettet gat ar brofeted ? Perak pas he anaout evit map Doue, pa lavar e-zeo e guirionez map Doue ?

Mez Kaifaz dallet gat he oual-ioulou a gave guelloc'h en hem rei d'he gassoni eget klask sklerijen. Lavare a ra eur vech c'hoaz d'he gonsortet a ne dalont ket muioc'h egetha : « Blasfemet en deuz. Petra' zanjit ? ha pehini eo ar boan dleet d'an den-ze ? »

« Ar Maro ! a lavarjont holl var eur vouez. »

Jezus a resevas ar zetans euzuz-se eb en hem glemm. Truez en doa ouz an dud reuzeudik-se a gondaone arezha d'ar maro. Rak gullet a rea dija an deiz ma tiskenno euz an env evit terri ho zetans, hag ho stleja d'ho zro dirak tribunal ar justiss di-druez.



VII.

AR RENEGAT.

E PAD an nozvez euzuz-se, petra oa deuet da veza an ebestel? Hini anezho n'an doue kaloun aoualac'h evit mont da heul ar mestr bete Jerusalem. Mez tec'heta rejont an eil varlerc'h egile dre an denvalijen hag e zejont da guzet en draoñien. Eno, er c'havargnou toullet e kreiz ar reier, e kavont eul leac'h distro da c'hortoz antronoz. Daou anezho gouskoude, Per ha Iann, pa oue passeet ar moment kenta a spount, a reas ho zonz da heuill a-ziabell an dud a gasse Jezus da balez Kaifaz. C'hoant o devoa da c'houzout petra' vije great d'ho mestr, eb en hemlakaat e tro da veza paket ha goal-gasset evel dha.

Pa zioueziont var menez Sion, Jezus a ioa dija dirak he varnerien. Iann a ias ar c'henta er palez. Per, abalamour d'an taol kaer en devoa great er jardin, en doa aoun hag a jommas er meaz. Iann a reas eur zell var an dud a ioa dre eno hag evel ne vele netra ag a elje ober aoun dezho; e zeas da glask Per hag e tigassas anezha gatha er porz.

Er porz-se, oa eun nebeud mad a zoudarded hag a vevelien e c'hortoz ma vije echu ar prosez. Evel

ma z'oa ien an noz, o doa elumet eun tantad e kreiz ar porz. Edont e tomma en-dro dezha hag e tivizent var ar pez o doa great en noz tremenet. Iann ne zaleas ket en ho zouez; mez mont a reas dioc'h-tu d'anzal, el leac'h m'oa dastumet konseillerien ar Sanhedrin. Per, er c'hountrol, a jommas e kichen an tan da c'hortoz ma vije echu an abaden, evit gouzout petra' ioa greet da Jezus.

An abostol, n'oa en dro dezha nemed adversourien dhe vestr. Epad m'edo e tomma, e kleve an dud groz-se e c'hoapaat profed Nazareth. Guelet a reas sklear, dioc'h ho lavarou, n'oa netra vad da c'hortoz a berz ar varnerien hag he ene a ioa gla-c'haret. Kaer en doa klask miret, he vizaj a zouge tress an nec'hamant hag an dristidigez. Eur borzierenz euz ar palez, pa vel an den estren-ze ker sioul, ken tenval he benn, n'eilas ket miret da lavaret d'an dud a ioa en-dro dezha: « Me a zo sur edo hema e kompagnunez an den-ze a zo bet arrettet. »

An holl a droas da zellet ouz Per, ha setu ma lavaras ar vaouez-se dezha: « Ha c'hui ive a ioa gat Jezus a C'halilee. » Pa glevas ar rebech-se, Per a gredas oa kollet. Seblantout a reas dezha beza arrettet, garrotet ha stlejet dirak an dribunal evel he vestr.

« Maouez, emezha dre he spount, ne ouzoc'h ket petra' livirit; ne anavezan ket an den-ze. »

Per en doa komzet ker grounds ma ne gavas ar c'hreg netra da lavaret. Mez Per a velas n'oa ket deuet mad d'an dud-se hag a dec'has affo bete dor ar palez. Neuze ar c'hillok a gasas. Hogen, Per, er meaz anezha he unan, en devoa ankouna'cheat ar pez en doa Jezus lavaret dezha. Edo e vont er meaz,

pa ziouezas eur vatez all ag a lavaras d'an dud a ioa bodet eno :

« Hema ive a ioa gat Jezus a Nazareth. » Per a nac'has adarre. Evit n'hen dije ket an earda de'het kuit, e tistroas var he c'hiz ha dont a reas adarre e kichen ar zoudarded hag ar mevelien. Ne taleas ket na deuas eun toullad tud en-dro dezha aga felle dezho gouzout petra oa. Krial a reant outha : « Eb douetans ebed, c'hui a zo euz an dud-se. Anzavit e zoc'h unan euz he ziskibien. » En dro-ma, an abostol, spountet, n'e ket aoualac'h evitha nac'h he vestr ; mez toui a ra zo-ken ne anavez ket an den-ze ha ne d'eo e nep fessoun euz he ziskibien.

Lezet oue neuze didrabas epad eun heur. An dud a ioa troet ho spered etrezek ar prizounier. Bep an amzer, tud e tont er meaz euz an dribunal a gounte ar pezh o doa guelet ha klevet. Per a zelaoue piz kement a lavarent. Ober a rea zo-ken goulennou outho. Setu unan euz he amezeien, pa glev anezha e parlant, a lavar dezha krenn : « Kaer oc'h euz nac'h, c'hui a zo euz ar Galilee ha diskib da Jezus. Ho fessoun da barlant hen diskuez sklear aoualac'h. »

Tud ar Galilee o doa eul langaj hebre groz hag ho c'homz a ioa difessoun. Setu an holl zellou adarre var an abostol. Unan euz a reveien ar belek braz, kar d'an hini en doa Per troc'het dezha he skouarn, a lavar dezha : « Ia, guir eo ; me a meuz ho kuellet er jardin gatha. »

Pa glevas ar ger-ze, Per a deu da zonz dezha euz an taol kleze en doa roet da Valkuz ha dija e seblant dezha beza etre daouarn he vourrevien. Mont a reas he benn digatha hag en hem lakeas da doui,

da zrouk-pedi, da vallozi, hag e lavar a-grenn ne anavez ket an den-ze ha n'hen deuz morse hen da-rempredet.

Teir heur oa neuze. A veac'h en doa Per paouezet da barlant ma kanas ar c'hillock evit an eil guech.

Kerkent, e teu da zonz dezha euz a gomzou he vestr : « Araok m'en dezo ar c'hillock kanet diou vech, c'hui o pezo va nac'het teir guech. »

Strafillet bete goeled he ene, e komprenas neuze peger braz oa he bec'hed. Hen, paour keaz peketaer var lenn Jenezareth, savet gat Jezus d'ar renk huel a abostol ; hen, ar mean found dibabet gat ar mestr evit azeza varnha he iliz ; hen, bet test a gement a viraklou ; hen, goude beza embannet oa Jezus guir Doue ; hen, a zo e paouez her nac'h evel eun den digaloun, goude beza touet dezha, nebeud heuriou araok, e vije marvet kentoc'h eget hen dilezer ! He vestr muia karet a c'houie marvad petra en doa great. Rak he lagad lemm a vele peb tra.

Ar zonz-se a bouez ker pounner varnha ma ne vel mui netra, ma ne glev mui netra euz ar pezh a dremene pe a lavaret en-dro dezha. Mez euz goeled he galoun drebet gat ar remors e save evel eur c'hri a c'hilac'har : « Aotrou, o pezet truez ouzin paour keaz pec'her. » Evel guechall, var ar mor, Per a vele e zea d'ar-strad hag a c'houlenne sikour.

Setu ma klevet eur iouherez spountuz e tont euz ar zal, el leac'h m'edo he vestr.

Diyorfila'ra neuze. Klevet a reat an dud e krial a bouez-penn : ar maro ! Ar maro ! ha goude e vel-jot ar zoudarded e tont er porz. Jezus a ioa en ho

zouez, chadennet, ker seder evel en deiz ma oa en hem lakeat etre daouarn he inimied. Douget oa ar zetans hag edot e kass Jezus d'ar prizoun, evit tremen an nemorand euz an noz.

Per, kerkent a m'hô guelas, a vennas koeza d'an douar. He zaoulagad ne dec'hent ket divar he vestr hag evessaat a rea mad oc'h kement a rea. Mez setu an dud e torit dre al leac'h m'edo Per. Ema eta Jezus e vont da dostaat outha, da dremen en he gichen ! Per a ioa an daelou en he zaoulagad hag he galoun bruzunet a c'houlenne pardoun. Jezus en devoue truez outha. Eleac'h distrei he benn, e reas eur zell var he abostol kabluz, mez gat kement a vadelez, kement a garantez, gat rebechou ken douss, ma santas Per he galoun e teuzi en he greiz. Diroll a ra da ouela ha dioc'h-tu e za er meaz euz ar palez.

Eur pennad dioc'h ti Kaifaz, e traonien denval ar Jehenn, e zoa eur c'havargn distro. Eno, e zeas Per da ouela goalc'h he galoun ha da zonjal er vad en eur gomz a Jezus ag a gompren brema, re zivezad, siouaz !

« Ar spered a zo prim ; mez ar c'hik a zo dic'halloud. Beillit eta ha pedit evit ne goessoc'h ket en dentasion. »



VIII.

BARN AR SANHEDRIN.

An abaden noz a echuas var-dro teir heur. Mez evit kuzet ar pezh o doa great a enep al lezen epad an noz-se, ar varnerien a roas ho ger d'en hem gaout adarre assamez da bemp heur evit dougen ar zetans, evel m'oa red. Arabad e ve kredi e zeo piket ho c'haloun gat an taol disleal o deus great en noz tremenet ; nan : Mez red eo diouall mad evit troumpla ar bobl ha miret na ve roet tro d'ar gouarnar romen da derri ho zetans.

Da c'hortoz an deiz, Jezus oue kaset gat ar goardou en eun toull terval, e prizoun an dud barnet d'ar maro. Ebarz e zeas gatha eur vanden soudarded ha mevelien. Eno epad div heur hir, an dud fall-ze a gredas e c'hellent ober peb iuzerez d'an hini a ioa bet hanvet blasfematour gat Kaifaz, e kreiz ar Sanhedrin hag en doa zo-ken lezet da fassata gat he vevelien. Ober a rejont dezha pep seurt dismegans ha disprijans. Rei a reant dezha an hanoioù falla ha lakaat a reant ho flijadur e c'helei he vizaj sakr gat ho c'hraichadennou lor.

Evel ne lavar Jezus ger, e za drouk ennho hag e saillont varnha evel eun torrad loened gouez. Skei a reont varnha gat ho daouarn ha gat ho zreid ; hen teuler a reont euz an eil d'egile evel eur c'hoariel. Erfin, e vouchont dezha he zaoulagad hag e teñont an eil var lerc'h egile da rei dezha fasadou hag e lavarent : « Krist, divinit d'eomp-ni pïou en deuz skoet ganeoc'h ; hag e laoskent en he enep a bep seurt jarneou ha blasfemoù, peadra da lakaat da grena an diaoul he unan.

Dont a reas da zoni da Jezus epad an amzer-ze euz ar pezh en doa lavaret Isai : « Ne zistroin ket va fas dioc'h ar re a fell dezho va skei ha va gelei a grainch. » He zaoulagad beuzet er goad a vele he vourrierien eb kemeret outho kassouni hag a-dreuz he vuzellou brönduet ne deue ket eur glemmaden. Gortoz a rea, eb en hem jala, ma vije digoret varnha ar prizoun-ze, goassoc'h kalz eget keo al loened gouez.

Vardro pemp heur, e teujot da gemenn d'ar goardou edo ar pennou braz er Sanhedrin e c'hortoz ar prizounier. Ar zoudarded a zavas en he za Jezus gourvezet e c'harz ho zreid, fuillet he vleö, he vizaj goloet a grainch hag a loustont, ha goude beza lakeat dezha adarre he jadennoù e kassont anezha beteg an dribunal.

En dro-ma, tud ar Sanhedrin a ioa holl var zao, re goz, beleien ha doktored. Felloud a rea dezho gelei an traou disleal a ioa bet great en noz tremenet, lakaat en ankounac'h an testenioù faoz, hegar ar prezidant, hag ar zetans douget a enep peb guir. Setu perak o doa c'hoant brema da ober peb tra hervez al lezen. An dud keiz ! Dallet gat ar

vall o doa d'en hem zizober dioc'h Jezus, n'o doa ket lakeat evez e zoa eul lezen ag a zifenne ouz ar varnerien dont d'an dribunal deiz gouel ha derc'hent ar zabbat, hag araok sakrifiis ar mintin.

Evit ar prosez, ne glasker ket brema testenioù evel ar re a ioa bet roet diagent. Ar c'honseil braz n'en deuz nemed eun digarez evit barn Jezus hag e zeo abalamour m'eo falvezet dezha tremen evit map Doue, ar Messias promettet da Israël. Prinset ar veleien ne gemerint nemed evit ar Messias an hini a rea fae var an artikloù vean o doa staget ouz lezen Moïzes ; an doktored ne gemerint ket eur rabbin a ne ket bet er skol gatho hag a laka anezho gouskoude er zac'h, bep taol ; an dud koz ne fell ket dezho euz eur Zalver a ne ve ket goest da ganna ar Romaned ha da zével rouantelez David. Den ne felle dezha kaout Jezus. Hogen, lavaret en doa oa ar Messias ; red eo eta dezha mervel. Pa deuas dirak ar Sanhedrin, ar prezidant ne c'houlennas digatha nemed eun dra :

« Mar d'oc'h ar C'hrist, livirit d'eomp. »

Jezus a respountas :

« Ma lavaran e zoun ar C'hrist, n'hem c'hredot ket ; ha mar gran deoc'h eur goulenn bennak d'am zro, ne respountoc'h ket ha n'hem lezot ket da vont kuit. »

Ar c'homzou-ma a ziskueze peger braz oa maliss an dud-se. Ne ket barnerien oant e klask ar virioenez, mez bourrevien lakeat gatho en ho spred dougen, kousto pe gousto, eur zetans a varo. Jezus a zellas outho a-fas hag a lavaras dezho var eun ton leun a vajeste : « Grit ar pezh a fell deoc'h ; mez gouezit er-vad ; map an den, pa ze euz ar bed-ma,

a ielo da azeza en tu deou da Zoue holl-galloudek. »

Pa glever ar c'homzou-ze, e sao ar pennou en ear. Ne ket eun den eo a c'hell azeza en tu deou da Zoue holl-galloudek. Komz evel a rea, a n'oa ket eta klask tremen evit Doue ?

— « Neuze'ta, oud map Doue ! oue lavaret dezha.

— « Guir a livirit, map oun da Zoue. » Pa gle-vont ar gomz-se, e tirollont holl da grial var eur vouez :

« Ema e paouez anzaou he dorfed. Din eo a varo ! Koundaonet oue eta evit beza manket d'ar vro e kemeret eb guir an titr a Vessias ; evit beza manket da Zoue dre m'hen doa lavaret oa map Doue. Neuze e rojont urz da gass Jezus bete pretoar ar gouarnner romen evit ma vezo ar zetans o deus douget aotreet gatha ha ma vije dioc'h-tu kasset Jezus d'ar maro.



IX.

AR MILLIGET.

PAD an nozvez trubuilluz-se, e vije bet gellet guelet eun den sioul, tenval he benn ; e troïdellat en dro da balez Kaïfaz. An den-ze oa Judas. Abaoue ar pok traitour en doa roet d'he vestr er Jardin Olivet, oa krignet gat ar remors. Judas ne felle ket dezha lakaat Jezus d'ar maro, mez kaout arc'hant. Esperout a rea beteg ar moment diveza e vije bet Jezus treac'h d'he varnerien hag e vije tec'het a-dre daouarn ar goardou a ioa en-dro dezha. Setu perak e lakea evez mad oc'h kement a bassee abaoue eun nebeud heuriou. Pa glevas oa kondaonet Jezus d'ar maro, e velas peger braz oa he dorfed, ha pa velas ar zoudarded e kass Jezus da balez ar gouarnner romen, e velas er-vad oa kollet.

Sevel a ra neuze en he ene eun dizesper diremed. Evel ma z'oa lod beleien e tistrei d'an templ goude ar zetans, evit kinnig ar sakrifik dioc'h ar mintin, Judas a ieas d'ho heul, ha gatha en he zourn ar peziou arc'hant en doa touchet evit priz he vestr. Kerkent a ma zint erruet el leac'h santel, e zeas dirazho hag e lavaras gat eur vouez melkoniet :

« Pec'het em euz en eur verza deoc'h goad an den just », hag e kinnigas dezho ar ialc'h a ioa enghi an tregont diner. Rak devl a rea he vizied diouthi. Marteze, oc'h en hem ziskulia he unan, oc'h embann oa divlamm Jezus, o restitui ar pezh en doa bet evit he dorfed, e sonje dezha en dije gounezet an dud-se hag en dije bet digatho eun tam sikour bennak evit he vestr, da vihana evit miret na vije lakeat d'ar maro. Mez affer en doa oc'h tud ag a ioa kaletoc'h c'hoaz ho c'haloun eget na oa he hini ha muioc'h douget d'an drouk. Sevel a rejont ho dioukoaz hag e respountchont dezha en eur c'hoarzin :

« Ma oc'h euz goerzet goad an den divlamm, petra'ra an dra-ze d'eomp-ni ? Kement-se a zell ouzoc'h. »

Judas en deuz remors ; ar Sanhedrin n'en deuz ket. Ar Sanhedrin ne dal ket Judas. Judas her barn hag her c'hondaon.

Kasset kuit gat ar Farizianed, he vignounded koz a n'o deuz mui brema evitha nemed disprijans. Judas a gemer kassouni outha he unan. Mont a ra beteg an aoter, teuler a ra er Santual he dregont pezh arc'hant hag e za d'ar red er meaz euz an templ evel eun den penfollet, eb gouzoud e pe du skei. Divar menez Moriah e tisken e traoñien Josafat. Eno e chomm da droidellat e kreiz ar beziou. Tremen a ra e kichen bez Absalon, ar prins milliget a en hem zavas a enep he dad. Guelet a ra menez Olivet. E traoñ ar menez-se, n'euz ket pell c'hoaz, Jezus en doa lavaret dezha :

« Va mignoun, dre eur pok e traissez da Zoue ! » Klevet a rea ouspenn e goeled he goustians, eur

vouez, mouez Satan a ne baoueze da lavare dezha.

« Milliget oud, ha milliget da viken ! »

Goudeze, e za da draoñien ar Jehenn, hent striz ha doun, leun a atrejou hag a veziou, imaj an ivern a zo hanvet ive Jehenn.

Judas a ia goustadik. Pignat a ra var an dachen a zo dirak menez Sion. Ne oa nemetha e park ar poder. Eur vech c'hoaz, ar milliget a zell gat dizesper ouz ar gear e deuz lazet he Doue. Dilassa ra he c'houriz a ioa bet enghi an tregont diner hag en hem groug ouz eur vezen.

Korv an traitour a oue kavet e c'harz treid ar vezen. Al lass a ioa torret hag he gory en eur goeza a stok d'an douar a ioa digoret, hag he vouzel-lou a ioa deut er meaz anezha. Beziat oue e park ar poder.

Ar veleien ne fellas ket dezho lakaat arc'hant Judas e tenzor an templ, abalamour ma zoa priz ar goad. Mez prena rejont gat an arc'hant-se park ar poder, el leac'h m'oa en hem grouget hag e rejont anezha eur vered evit an dianvezidi. Ar park-se eo an hini a zo hanvet hirio c'hoaz *Haseldama* da lavaret eo, priz ar goad.

Evel-se e varvas Judas. Evel-se e varv kement Judas a verz Jezus evit eun nebeud arc'hant. Ho spered tenvaleat ne gred ket mui e trugarez an aotrou Doue ; ho c'haloun kaledet ne gred ket mui er garantez. Ho ene, en dizesper, a guez izella ma c'hell, el leac'h ma klev ar c'homzou-ma a lavare Jezus da Judas :

« Goaz a-ze d'an hini a ro ar skouer fall ! »





X.

JEZUS DIRAK PILAT.

RED oa e vije marvet map an den, nan evel eun torfetour barnet gat justiss he vro, mez evel eun den divlamm a ro a volonteiz vad he vuez evit an dud kabluz. Evit ma vije ar virionez-se eaz da anaout d'an holl hag e peb amzer, Doue a rei d'ar barner braz diskleria dirak an holl oa divlamm petra bennak m'her lakea d'ar maro.

Ar mestr braz oa ar gouarner romen. Abaoue tri bloaz var'nugent ar Judee deuet da veza eun departamant euz a rouantelezh braz-Rom, a ioa diskaret euz he renk koz. Eur gouarner a ioa lakeat brema gat an impalaer e penn ar vro hag hen ebken a elle kondaoni d'ar maro. Konseil ar Sanhedrin a elle eskummunugen, prizounia, skourjeza. Mez ne elle ket barn d'ar maro. Tud ar Sanhedrin a lenne, eb digeri ho daoulagad d'ar sklerijen, ar pezh a lavare ar profed Jakob : « Ar stur pe goalen ar mestr ne vezo ket tennet digat Juda, hag an hini en deuz galloud da zougen lezennoù a jommo en he di, ken na c'houlaoù an deiz kaer ma c'hano ar Messias gortozet gat an holl vroioù. » Ar stur a zo eat euz a-dre daouarn Juda etre daouarn

an Impalaer ; hag an hini en doa karg da ober lezennoù e touez ar Judevien n'en deus mui an disterra galloud da gondaoni d'ar maro. E rank eta ar C'hrist beza deuet pe e zeo faoz komzou Jakob. Ia, deuet eo ar C'hrist ; mez e leac'h he anaout e zeont da c'houlen eur zetans en he enep, e tribunal ar baianed.

Abaoue ma oa bet kasset kuit ar roue Arkelaus, Pons-Pilat oa ar c'huec'hved digasset da c'houarn ar Judee. Pemp bloaz a ioa edo er post-se, aoualac'h evit beza kasseat gat an holl Ourgoùilluz, troet varzu an arc'hant, lorc'h enna gat e ditr a romen, n'en doa nemed disprijans evit ar Judevien, ho relijion hag ho lezennoù ; ha ne vanke ket d'hen diskiez dezho, ken aliez a ma elle. N'en doa ken aoun nemed da zisplijont d'an Impalaer. Evit ober al lez d'he vestr hag ive evit ober an hek ouz ar Judevien, e kassas da Jerusalem soudarded gat drapoioù ag a ioa varnho patrom an impalaer. Kement-se a ioa a enep lezen Moizes. Ar Judevien, drouk énnho, a i eas d'ar gear hanvet Sezaree da c'houlen digat ar gouarner a ioa eno e chomm, ma tougo respet d'ho relijion. Epad seiz dervez dioc'h-tu, ne fellas ket dezha ho zelaou ha gourdrouz a ra memez ho lakaat d'ar maro ma chommont en-dro d'he balez. Mez ar re-ma a respountas e vijent eat holl d'ar maro beteg an diveza kentoc'h eget senti. Pilat a roas urz da zigass an drapoioù, en-dro, da Zezaree. Ar goâl dretamantchou-ze o doa savet kement a gassouni outha, ma zoat bet meur a vech dija e kaout an impalaer evit her pedi d'hen tenna ac'hano. An traou-ze ne reant nemed kreski he gounnar. Mez gat aoun da veza flatret adarre ha mar-

teze torret euz he garg, e ranke mont goustadik.

Pilat pervuia a jomme e Sezaree, kear e doare Rom ha var ribl ar mor Mediterranee. Pa deve goueliou Pask, e zea bep bloaz da Jerusalem gat forz soudarded evit derc'hel an urz vad hag ar peoc'h er gear-ze a vije ennhio d'ar mare-ze meur a vilioù a dud dianvezidi. Loja' rea e palez kaer Antonia, eur c'hastell a n'oa ket eaz dont a-benn anezha, savet huel e kichen an templ hag a zioud kear evit en hem zioùal e ken kaz e savche eun emolc'h bennak e touez ar bobl.

Setu petra eo Pilat. Dirak an den ourgouilluz-se, a c'houarne en hano Rom, e vezo perechuet ar prosez boulc'het mad gat ar Sanhedrin. Setu kasset eta Jezus euz a balez Kaifaz da balez ar gouarner, daouzek kant paz ac'hano. Skuiz maro goude eun nozvez ken trubuiluz, stilejet gat ar goardou a jache var he liammou, Jezus a gerze gat poan etre prinsed ar veleien, ar zoudarded hag eur bobl diskiantet ne baoueze da grial ha da iudal. Er gompagnunez-se, e tiskennas divar menez Sion e kear, ha goudeze e zeas bete palez ar gouarner.

Seiz heur oa. Kalz tud a ioa er porz. Chomm a reant er meaz gat aoun da bec'hi a enep al lezen en eur vont en eun ti paian. Pedi a reont eta ar gouarner da zont er meaz eun tamik evit klevet ho goulenn. Pilat a ouie petra zontje ar Judevien divar bouez Jezus. Rak abaoue tri bloaz, ar Judee a-bez, ar Galilee ha zo-ken ar broiou divar-dro, n'oa ken komz ennhio nemed euz a brofed Nazareth hag he adversourien. Prokula zo-ken, he bried, e devoa desket lezen Jezus hag a dremene anezha evel eun den deuet a-berz Doue. Pilat en doa sonj

eta da denna an den mad-se a dre daouarn ar Farizianed venjansuz. Ne elle ket ho gouzaon. Goulenn a ra digat pennou braz ar Sanhedrin a zo dirazha :

« Petra oc'h euz da rebech d'an den-ma ? » Ar Judevien a gavas diez e vije great outho eun henvelep goulenn. Lakeat o doa, kredapl braz, en ho fenn en dije Pilat laosket Jezus gatho dioc'h-tu, eb enklask hag e lavarjont dezha dichek :

« Ma ne vije ket bet an den-ze eun torfetour n'or bije ket hen digasset deoc'h ama. »

Evitho, ar pezh a rea Pilat a ioa eun dismegans vraz. Goassoc'h a reas gouskoude. Lavaret a reas dezho dre c'hoaperez :

— « Kemerit-hen oc'h unan ha barnit anezha hervez ho lezen. »

— « Gouzoud a rit er-vad, emezho en eur iouhal, n'or beuz ket a c'halloud da gondaoni d'ar maro ; hag hema a zo eun den fall hag a zo din a varo. »

— « Mad-tre ; eme ar gouarner ; mez evit an eil guech e c'houlennan diganeoc'h petra oc'h euz da rebech dezha. »

Eaz eo gouzout n'edo ket Pilat e vont da gondaoni Jezus var ho ger eb gulet dreizha he unan a betra oa tamallet. Red oue eta dezho lavaret ar pezh o doa en he enep. Ar Sanhedrin en doa her c'hondaonet d'ar maro var zigarez ma lavare oa map Doue. Brema, ar Judevien all a fell dezho hen tremen evit eun den fall a glask sevel ar bobl a enep an impalaer. Ar gouarner ne reas stad eb ed euz ar geier-ze. Mez felloud a reas dezha gulet piz ar prosez evit gouzout mad petra da ober. Trei a ra var he zeulioù hag e za da azeza var he gador

a varner. Kasset gat ar goardou, Jezus a bignas deleziou marbr ar pretoar hag a oue he unan dirak ar gouarner. Hema, eb ober van euz an traou diskiant ha sot o doa berniet ar Juzevien en he enep, a fellas dezha gouzout petra zinifie an titrou a roue hag a Vessias a gemere Jezus.

— « A c'hui a zo roue e guirionez, emezha? »

— « A goulenn a rit-hu kement-se diganhen ac'hanoc'h oc'hunan evit gouzout piau oun, pe re all o deffe lavaret an traou-ze deoc'h ac'hanon? »

— « Me n'oun ket Juzeo, a lavar Pilat ha ne m'oun ket kalz e poan gat an trouz a zo etrezoc'h divar benn ar relijion. Ar veleien hag ar bobl o deuz ho tigasset d'am zribunal abalamour ma fell deoc'h tremen evit roue; ha brema e c'houlennan diganeoc'h perak e kemerit an titr a roue. »

— « Va rouantelez, eme Jezus, n'eo ket euz ar bed-ma. Ma vije bet euz ar bed-ma, em bije bet ive tud da ober brezel evidon ha d'am dioual a enep ar Juzevien. N'oun deuet da ziskar den divar he droun. Eur vech c'hoas, va rouantelez n'eo ket euz ar bed-ma. »

Pilat ne velas ket sklear aoualac'h a be rouantelez e komze Jezus. Gouzout a rea gouskoude n'en doa ket an impalaer nep izom da gaout aoun razha. Eur goulenn a reas c'hoaz dezha :

— « Dioc'h a livirit, e zoc'h eta roue? »

— « Ia; roue oun, eme Jezus. Deuet oun er bed-ma evit renta testiñ d'ar virionez, hag ar re a zalc'h mad d'ar virionez a zelaou va mouez hag a zo va zujidi. »

— « Ar virionez ! a lavar Pilat en eun vousec'ho-arzin, e pe leac'h emañ ar virionez? »

Ar gouarner en doa klevet komz meur a vech a relijion, filozofi, kredennoù dishenvel an eil diouz eben. Mez, ar virionez, piau ell he anaout? Evitha, Jezus n'oa ket eun den fall, n'oa ket eun den a zizurs, a zispac'h, mez eun denik divaliss. Ar pezh a brezege n'oa ket marvad hervez kredennoù ar Farizianed. Mez petra'ra dezha an trouz a, zao etrezho var bouez ar relijion ! Distrei a ra eta var-zu prinsed ar veleien hag e lavar dezho en eur ziskuez Jezus :

— « Me ne gavan netra da damall en den-ma. Rak-se, ne ellan ket he gondaoni. »

A veac'h en doa perachuet he gomz, ma savas eun trouz spontuz e-touez ar bobl. Prinsed ar veleien hag ar pennoù braz a vernie a bep seurt geier a enep Jezus, ha Jezus ne lavare ger. Pilat a die diarben an dud fallagr-se a damalle Jezus e gaou. Mez kemeret a reas aoun razho hag e lavaras da Jezus :

— « Petra eo deoc'h ne respountit ket d'ar re a zo oc'h ho tamall? »

Mez Jezus her selaouas eb lavaret ger, en henvelep fessoun ma zoa diez spered ar gouarner. Rak ar Juzevien a boursu anezha brema divar benn ar politik, diouz ho c'hlevet, e vije lavaret en doa lakeat an tan er vro ed-a-ded, adalek ar Galilee (eno en doa great he brezegennou kenta) bete Jerusalem.

Pa glevas an hano-ze a C'halilee, Pilat a reas d'ar Juzevien tevel. Kaout a rea an tu da deuler var eun all an affer-ze a roe dezha kement a nec'hamant.

— « Euz ar Galilee eo, emezha? Neuze emañ dindan galloud Herodez, a zo brema e Jerusalem,

kassit dezha Jezus evit ma varno anezha hervez m'hen deuz guir d'hen ober. »

Goude ar c'homzou-ze e troas he gein d'ar bobl hag en hem dennas en he balez, Den ar finessaou, a ioa joa gatha beza kavet an dro da deuler ar bass var eun all.

Mez e goeled he goustians ne zante ket an dis-terra remors da veza, dre interest, traisset ar justiss hag ar virionez.

Da c'houde tout, petra eo ar virionez, a lavare Pilat.



XI.

JEZUS DIRAK HERODEZ.

ESER eiz heur oa dioc'h ar mintin. Eur c'hannad a berz Pilat a ieas d'ar red da rei da anaout da Herodez edo he vestr, dre respet evitha hag evit ar guir en doa evel roue, e vont da zigass dirak he dribunal eun den hanvet Jezus a Nazareth, tamallet a galz torfejou.

Eb douetans ebed, Pilat en dije gellet barn ar Galilean-ze. Rak var douar ar Judee oa bet arretet. Mez guelloc'h ekave lakaat an affer etre daouarn ar roue, mestr kenta Jezus, pa zeo guir eo ganet ha domisiliet er Galilee.

Ar roue Herodez n'edo ket var c'hed d'ar merk-se a vignouniaj a-berz Pilat. Ne oue nemed muioc'h a-ze a fouge enna. Rak abaoe meur a vloaz n'en hem velent ket. Ouspenn-ze kaout a rea an dro da velet profet Nazareth, en doa c'hoant da velet pell a ioa.

Ar roue libertin-ma a veve gat Herodiadez, he c'hoar gaer, evel pried ; en doa lakeat lann Vade-zour d'ar maro. Mall en deuz da ziviz gat an den-ze ker brudet dre he furnez ha dre an niver a vira-klou a rea ag a douelle ar bobl abaoe tri bloaz.

Palez Herodez a ioa eur c'hant paz bennak dioc'h tour Antonia. Jezus atao chadennet, atao en dro

dezha ar bobl vil e kounnar, a oue kasset gat pen-nou braz ar Sanhedrin. Azez et var he droun, ar roue a ioa ouz he c'horthoz. En dro dezha edo tud he balez ag a zonje dezho koulz ag ar roue edont e vont da gaout eno eur frapped plijadur. An den li-ber-tin a gav plijadur gat peb tra, zo-ken gat poa-niou hag angoni an den just, Mez en dro-ma, oant faziet.

Jezus epad ma oue dirak Herodes, en despet da iouherez ar bobl, en despet da gement a damalle dezha he adversourien a jommas sioul; ne lavaras ket eur gomz. Herodez, den a skiant hag a zeska-durez, var he veno, a reas dezha kalz goulennou var bouez ar beac'h a ioa savet etrezha hag ar Fa-rizianed divar benn al lezen, var ar galloud en doa, var ar pezh en doa sonj da ober. Goulenn a reas zo-ken digatha m'hen dije great eur mirakl dirazho. En he za dirazha, he zaouarn chadennet, Jezus her selaouas eb ober van. Herodez hag he dud a zelle an eil ouz egile, estounet ha chifet. Prinsed ar veleien a gav eo deuet ar moment da gaout eb poan digat ar roue eur zetans a varo. Lavaret a reont dezha ne deo an den-ze nemed fall hag ema abaoue pell amzer e klask trei ar bobl a enep ar roue. Lavaret a ra ouspenn eo ar C'hrist, map da Zoue. Hen, He-rodez a dlie savetei ar vro hag ar relijion en eur lakaat anezha d'ar maro. Herodez a lavaras da Jezus eil-geria outho. Mez ne ellas kaout digatha nak eur gomz, nak eur zell, ker ouaz a pa vije bet bouzar ha mut.

Jezus a brijas komz oc'h Judaz, oc'h Kaifaz, oc'h Pilat, memez oc'h al lakez en doa roet dezha eur javedad. Mez ne gomz ket ouz Herodez abalamour

Herodez en deuz mouget diou vouez vraz an Aotrou Doue, mouez Iann-Vadezour ha mouez he gous-tians. Herodez n'oa mui eun den; eul loan n'oa ken; ha map Doue ne gomze ket d'al loened.

Roue ar Galilee a ioa c'hoaz leun c'hoad dioc'h Iann—Vadezour hag en doa diegi e skuilla adarre goad hag e c'hober eur merzer muioc'h. Guelloc'h e kavas ober eur c'hoariel euz a Jezus. Da c'houde tout, an den-ze a jomme mut n'oa ket eun torfetour ha n'oa ket din a varo. Mez evitho e zeo eun diot hag emaint e vont da rendael outha, da c'hoarzin divar he goust. Goudeze e vezo kasset en-dro da Bilat hag ar gouarnar a rei anezha ar pezh a garo. Ar zonj a ioa deuet e spered ar roue a blijas d'an holl dud-se brein gat an techou fall. Digasset oue eur zae venn hag oue guisket da Jezus dirak an holl. Ar zae venn oa guiskamant ar re vraz, ar rouanez, imachou an doueou hag ive ar re zot. Dioc'h kount Herodez, ar Jezus-se a lavare oa ar Messias, roue ar Juzevien, map Doue, n'oa nemed eur sot ag a ioa dleet pell a ioa guiska dezha ar zae-ze a zismegans. Hen disprijout a reas evel ma vez disprijet eun den diskiant hag her lakeas evel eur c'hoariel etre daouarn Aotrounez he balez hag he vevelien. Goudeze, p'hen devoue bet aoualac'h euz ar goaperez sakrilaj hag euz ar c'hoariou di-druez-se, e kassas Jezus en-dro da Bilat, gat ar re o devoa hen digasset.

Evelse a rei kement Herodez a deuio var he lerc'h, kement den brein a ziouano en amzeriou da zont. Divar ar guele a loustoni e maint astennet varnha, ho spered ne ello ket sevel bete Doue na beteg ar guirioneziou euz an aviel ha setu perak ho disprijint. — *Sprevit illum.*



XII.

AR VARN.

PILAT. dre he finessaou memez, a ioa en hem lakeat en eun enkreiz vraz. Vardro na'v-heur, pennoù braz ar Sanhedrin hag ar bobl atao d'ho heul, a deu adarre dirak he balez hag a c'houlén a bouez-penn ma vezo lakeat Jezus d'ar maro. Brema ne ket her pedi a reat da varn Jezus; mez an dud-se revoltet a entente héñ dije Pilat great hervez ho bolontez. Ma vije bet eno eun den a goustians eeun, héñ dijelavaret dioc'h-tu hag eb troidellerez oa Jezus divlamm, hag héñ dije lakeat skuba divar an dachen ar vanden dud-ze kounnaret. Pilat en doa great fall oc'h ho zelaou : e klask terri varnho; e ro dezho ho goulén ha ne ra nemed kreski ho hardisegez. Lavaret a reas gouskoude gat eun ton rust da brinsed ar vro a ioa e penn ar bobl-se diskiantet :

— « C'hui oc'h euz digasset an den-ma d'in-me evel eun den fall a lakea ar bobl d'en hem zevel a enep Rom. Setu, kaer a meuz goulén digatha, né gavan ket en deffe great an disterra tra euz ar pezh a damallit dezha. Kasset e meuz anezha da tribunal Herodez hag e velit er-vad n'hén deuz ket kén nebeud kavet anezha d'in a varo. »

Ar c'homzou-ze a verke en doa sonj da lakaat Jezus e liberte. Ar bobl neuze a ieas en egar evel

pa vije possedet gat an diaoul. Pilat a gemeras kément a spout ma lavaras, goude beza anavezet Jezus divlamm.

— « Mont a ran, emezha, da lakaat he gastiza ha goudeze m'her lezo da vont kuit. »

Sevel a ra adarre trouz ha iouherez; rak a zé-tans-ze a zisplije d'an holl. Mar deo Jezus divlamm, emezho, perak e skourjeza ? ha ma héñ deuz great an torfed a zo tamallet dezha, perak hé espern ? Abep korn euz an dachen, e sao kriadennoù gouez :

« Nan; nan; d'ar maro ! d'ar maro ! ni'fell d'e-omp e ve lakeat d'ar maro. »

Pa velas ar vanden dud-se dirollet, Pilat oue darbét dezha rei dezho ho goulén, pa erruas beteg enna eur c'hannad a-berz Prokula, hé c'hreg. Prokula a lavare dezha en hé lizer : « Gat a reoc'h, ne rit ket a zrouk d'an den just-se ha ne zammit ket varnoc'h ar bouez euz hé varo. Rak en noz-ma, e meuz bet kalz da c'houzaon dre va ure abalamour dezha. » Aliet a berz Doue, Pilat a zonjas savetei dezha hé vuez. Abaoue pell amzer, oa ar c'hustum gat ar Juzevien leusker eur prizounier e liberte e vit goueliou Pask. Kément-se a ioa e vit digass dezho da zonj euz ar joa vraz o devoue ho zud koz pa ouent delivret euz a gaptivité an Ejipt. Goude beza deuet da vistri d'ar Judee, ar Romaned a lezas gatho ar c'hiz koz-se ha, bep bloaz, ar gouarnér a lakea e liberte ar prizounier choazet gat ar bobl. Pilat a zonje kaout-eno an tu da zavetei ar profe

D'ar mare-ze, e zoa e prizoun Jerusalem eun ton fetour brudet, hanvet Barabbas. Hé hano ebken a roe spout d'an dud. Ober a rea ar vicher da laer ha beva'rea gat eun toullad tud fall evel dha, kuzet e kreiz menezioù ar Judee. Barabbas a ioa bet pri-

zouniet e kreiz eun abaden, pa edo e paouez ober eur muntr. Kondaonet oa da veza staget ouz ar groaz. — Pilat a grede savetei Jezus en eur rei d'ar bobl ar choaz etre Jezus ha Barabbas. Pemp dervez a ioa, an dud-se a zouge Jezus e triomp en eur gana : Hosanna da vap ar roue David. Ag e vouez a roio-hen da Varabbas, ken dallet eo gat ar gounnar ? Pilat en doa poan e kredi. Komz a ra eta a vouez huel dirak ar bobl. Digass a ra dezha da zonj euz ar c'hustum da rei al liberte da eur prizonier evit goueliou Pask hag e lavaraz dezho ober ar choaz dioc'h-tu.

— « Pehini anezh'o daou, emezha, oc'h euz c'hoant a ve laosket e liberte : Jezus pe Barabbas ? »

Ar bobl, pa glevas hano Barabbas, a jommas, eur pennad, nec'het. Mez pennoù braz ar Sanhedrin a vel kerkent an danjer. En hem zila'reont e touez an dud follet-ze evit ho issa c'hoaz hag ober dezho goulenn Barabbas. Setu perak, pa c'houlennas Pilat digatho evit an eil guech piou a vije lakeat e liberte, e savas kriadennou euzuz a bep-tu :

« Barabbas ! Ni fell d'eomp Barabbas. Roit d'eomp Barabbas ! »

Pilat a ioa drouk enna.

« A petra fell deoc'h a rin-me euz Jezus, roue ar Juzevien ? »

Ar bobl var eur vouez :

« Ra vezo staget ouz ar groaz. »

Pilat a c'houlenn neuze digatho :

« Pebez drouk en deus hen great ? »

Mez ar bobl ne zelaou ket hag a zalc'h da grial goassoc'h goaz :

« Ra vezo staget ouz ar groaz ! »

Pilat a ioa trec'het adarre. E leac'h renta dioc'h-

tu eur zetans hervez ar justiss, en doa kemeret spount rak ar bobl penn-follet, ha brema ar bobl-se a entent e vezo sentet outha ha roet dezha he c'houlenn. Ar bobl ne vel mui, ne glev mui ; eun tigr eo ag en deuz sec'hed goad. Pilat a zistro d'he zonj kenta. Ar bobl, emezha, a fell dezha kaout goad. Me a roio dezha goad mez dioc'h muzul.

Urz a roio da skourjeza Jezus evit rei d'ar Juzevien eul loden euz ho goulenn hag her lakaat goudeze e liberte. Setu he zonj.

Ar vourrevien a skoas eta var Jezus ken na goeze ar foet euz ho dourn. Distaga a reont neuze Jezus ha kass a rejont anezha anter-varo e porz ar pretoar. Eno oa dastumet eul loden soudarded romen. Eno oue kinniget adarre da Jezus goaperez sakrilaj ha poaniou kriz. Evel ma ranket teuler eur viskamant bennak var he gorr paour, dispennet ha leun a c'hoad, ar zoudarded deuet sonj dezho en doa Jezus lavaret oa roue, a zavas en ho spered guiska anezha evel eur roue. Teuler a rejont dreist-ha eur c'hoz vantel skarlek evel he vantel a roue hag evel goalen e lakejont dezha eur benduen en he zaouarn. Ober a rejont dezha ive eur gurunen spenn hag e lakejont anezhi dezha var he benn. Neuze e teuent an eil var lerc'h egile da blega eur c'hlin dirazha hag e krient dezha en eur c'hoarzin :

« Bonjour, roue ar Juzevien ! »

Neuze e savent en ho za hag e zeant beteg enna d'he fasata ha da grainchat ouz he vizaj. Kemeret a reant ar benduen euz he zaouarn hag e skoent gathi var ar gurunen.

Er stuz-se eo e kaschont anezha d'ho mestr. Pilat ne ellas miret da gaout truez outha ha kredi a rea en dije ar spes leun-c'hoad-se tenerreat ar c'ha-

lounou. Komz a ra adarre ouz ar bobl a ioa eat var ouassaat dre ma renke gortoz. Mont a reas er meaz da gaout ar Juzevien hag e lavaras : « Mont a ran d'hen digass ama deoc'h. Diskleria a ran eur vech c'hoaz e kavan an den-ze divlamm. Mez a pa n'e ve ket, e maoc'h e vont da velet e pe stad ema ha n'o pezo ket leac'h da glemm ac'hanon. »

Jezus kasset, gat ar zoudarded, e kichen Pilat, he vizaj goloet a c'hoad, ar gurunen spenn var he benn hag eur c'hoz tamm mantel var he ziouskoaz, a zo diskuezet d'ar bobl gat Pilat en eur lavaret a bouez-penn :

« *Ecce homo.* Setu a-ze an den. »

Ar gouarner keaz ho fede da zellet a druez outha. Mez moueziou ar pennou braz a zavas hag a lavaras :

« Stagit-hen ouz ar groaz ! »

Hag ar bobl var ho lerc'h a lavare a bouez-penn.

« Stagit ! Stagit ouz ar groaz ! »

Ar guel euz ar goad, e leac'h terri var an dud-se, ho lakea da hegari mui'oc'h-mui.

Pilat a gemer heug ouz eun henvelep tud hag en eur zellet outho gat disprijans e lavar dezho : « Me, he staga ouz ar groaz ! biken. Kemerit-hen hag her stagit ouz ar groaz. Rak evidon-mea lavar deoc'h eur vech c'hoaz : ne gavan ket en den-ze pe adra d'her c'hondaoni. »

Pilat ne grede ket eta e vije bet morse Jezus e klask lakaat ar bobl d'en hem zevel. Hennez oa gouskoude an torfed kenta tamallet dezha gat ar Juzevien. Ar re-ma, pa velont ne rea stad ebed euz ho c'hlemmou var ar poent-se, a zistroas var an torfed en devoa lakeat he gondaoni e tribunal ar Sanhedrin : ar blasfem. Koupabl eo, emezho, hag

hervez hor lezen-ni, e tle mervel. Rak he unan en deuz lavaret eo map da Zoue.

Pa glevas hano a vap Doue, Pilat a oue sebezet. He zaoulagad a jomme da zellet ouz Jezus bepred douss hag eb eur glemmaden. Dont a reas neuze da zonz dezha euz ar pezh hen doa lavaret dezha diagent : « Va rouantelez n'eo ket euz ar bed-ma » hag e c'houlenne ennha he unan a ne vije ket he-ma euz ar sperejou-huel a zigass an Doueou, bep an amzer, d'an dud evit deski dezho ho bolontez. Ar burzudou great gat Jezus ne ellent nemed krenvaat ar greden-ze en he spered. Pilat a en hem laka da grena gat aoun da veza goal lakeat eun doue bennak. Trei a ra kein adarre d'ar Juzevien, ha distro er pretoar e laka digass dezha Jezus evit gouzout sklear digatha a be leac'h e teue.

« A be leac'h e teuit, » a c'houlenn digatha ar paian-ze ne elle entent netra e mister Jezus-Krist, map unik da Zoue, en hem c'hreat den. Ar pezh a ouie eo e zoa Jezus roue ha n'oa ket he rouantelez euz ar bed-ma. N'en doa ket izom da c'houzout netra all evit dougen he zetans. Jezus a davas. Kaer en devoe Pilat her pedi, chomm a reas mut.

Kement-se a ioa aoualac'h evit peurziskar ar gouarner. En hem glemm a reas gouskoude ouz Jezus dre ma krede ne jomme eb respount nemed dre zisprijans.

« Ne respountit ket d'in, emezha ; a ne ouzoc'h-hu ket gouskoude e meuz peb galloud varnoc'h, da lakaat ho staga ouz ar groaz pe d'ho lakaat e liberte? »

Jezus neuze a respountas dezha :

« N'ho pije galloud ebed varnon-me, ma ne vije roet deoc'h euz an Env. »

Er memez amzer he lagad a ia bete goeled ene

ar gouarner evit rebech dezha he injustiss hag ar spount a gemere rak an dud. Gouskoude abalamour m'hen deuz great eun draik bennag evit klask he zavetei, Jezus a lavar dezha :

— « Ar re o deuz va lakeat etre ho taouarn o deuz great c'hoaz goassoc'h pec'hed. »

Nec'het-maro, Pilat a zao en he za. Lakaat a ra en he benn ober he zevel, kousto pe gousto, en despet da gounnar ar Juzevien. Distrei a ra eta da lavaret dezho eb troidellerez edo e vont da lakaat Jezus e liberte. Mez prinsed ar veleien hag ar pennou braz ne c'hortozent nemed ar moment-se evit plada ar gouarner.

« Mad ; mad ! emezho a bouez penn, laoskit anezha e liberte. Mez ne lavarit ket mui e vec'h mignoun Sezar. Rak an nep piou bennak a en hem c'hra roue a en hem zao oc'h Sezar. »

Pilat a jommas evel pa vije bet skoet gat an orz. Pa glevas hano Sezar e c'hankounac'heas Jezus, guiriou ar Justiss hag he galite a c'houarner. Ar Sezar neuze oa Tiber, eul loan kriz a lakea d'ar maro, var an disterra diskred, he vignouned memez hag he gerent. Pilat a zeblant dezha dija beza flatret, torret euz he garg ha kollet da viken. Evit en hem zavetei he unan ne gavas netra guelloc'h eget sakrifia Jezus.

N'oa ken da ober nemed dougen ar zetans hervez al lezen. Dirak ar pretoar e zoa eur gador huel, savet gat mein a bep liou hanvet en Hebre *Gabbatha*, da lavaret eo torgen, hag e gregaj *lithostrotos*, ar pezh a zinifi bern mein. Ac'hano e thie ar gouarner romen barn he dud. Pilat a deuas eta da azeza var an dribunal-ze. Jezus, liammet ha goardou mad en-dro dezha, a oue digasset dirazha. An holl

a ioa tro ho daoulagad gatho var Pilat ha var Jezus ha sioul braz oant evit klevet mad ar zetans.

Eur vech c'hoas, Pilat a ra eur zell var ar bobl ag a zeblant goulenn digatha *grass*. Diskuez a ra dezho neuze Jezus en eur lavaret.

« Setu a-ze ho roue. »

Doue eo a rea dezha embann dirak ar bobl follet-se oa Jezus roue. Respountet oue dezha gat iouherez estlammuz :

« A-dreñ, a-dreñ Jezus ! Ra vezo staget ouz ar groaz ! »

Ar Juzevien guechall a gemere kalz fouge gat ho bro ha gat ho rouanez. Pilat a glaske dihuna ar santimantchou-ze en ho c'haloun :

« C'hui, eta, emezha, a fell deoc'h e stakfen ho roue ouz ar groaz ? »

— « Ni, emezho evel tud digaloun, ne anavezomp ken roue nemed Sezar. »

Pilat, pa vel n'en deuz netra da c'hounid dioutho, krignet gat ar remors, a lavar a vouez huel dirak an holl, n'en deuz douget ar zetans-ze nemed en despet dezha. Lakaat a reas digass dezha dour hag en eur voalc'hi he zaouarn dirak ar bobl e lavaras :

« Me a zo divlamm euz a c'hoad an den just-ma. Evessait mad, c'hui, petra'rit. C'hui a respounto euz ar goad-se. »

Ar bobl a grias adarre goassoc'h eget biskoaz, ken na dregernie holl ruiou kear :

« Ra goezo he c'hoad varnomp ha var hor bugale ! »

Doue ne c'hortoze nemed ar gomz-se evit barn ive ar Juzevien.

Gouskoude, eur moment goude, oue kasset eun

den dre gear da embann ar zetans ha da rei anaoudegez anezhi hervez m'oa douget gat Pilat.

Jezus a Nazareth a vezo kasset a-dreuz ruiou kear beteg al leac'h ma oat kustumet da lakaat an dorfetourien d'ar maro. Eno e vezo divisket digatha he zillad, e vezo staget ouz ar groaz hag e chommo stag outhi beteg he huanad diveza. Kement-se, evit beza blasfemet, beza klasket lakaat ar bobl d'en hem zevel a enep an impalaer, ha beza kemeret an titr a roue.

Evel-se ec'h echuas ar prosez euzuz-se. Prinset ar veleien a ioa fouge ennhio da veza bet ar gcu-nid ; ar bobl, mezviet gat ar goel euz ar goad, a strake he zaouarn. Pilat nec'het ha tenval he benn a zistro d'he balez da guzet he vez. Jezus ebken, an Doue kondaonet d'ar maro a ioa he galoun leun a joa. An heur a c'hortoze abaoe m'oa deuet er bed-ma, heur ar sakrifis, a zo e paouez sini.



TAOLEN.

I.	Henor great da Jezus, pa bign da Jerusalem	5
II.	Ar goan diveza.	9
III.	Angoni	14
IV.	Jezus ereet	19
V.	Kenta goulennou	24
VI.	Jezus ha Kaifaz	28
VII.	Ar Renegat.	34
VIII.	Barn ar Sanhedrin	39
IX.	Ar Milliget	43
X.	Jezus dirak Pilat	46
XI.	Jezus dirak Herodez	53
XII.	Ar varn	56